

Ga jadernel ar Furnez

LE VR AR C'HRENN LAVARIOU

20 ar furnez a l'ez bridernezh eus ar stêr,
Laxant a ra la vuguet da evel war ar plesan e-t.

21 Ano ha rakskrid Brudet sialou grecus,
 ar barch kér eo'h abegn le c'homzou :

1. 1 Lavarennoù Salamon, Mab David, Roue Israhel, rion,
- 2 Evit anaout furnez ha kelennadurezh
 Evit kompreñ ar c'homzou a skiant,
- 3 Evit gonit spered ha deskadurezh
 Reizhder, barnedigezh hag eounded;
- 4 Evit reif poellegezh d'ar re skañv benn,
 Skiant-wat ha meiz d'ar gennarder.
- 5 D'an den fur da selaou 'vit ma vezo furoc'h
 D'an den poellek da anaout komzou a veizegezh,
- 6 Ma kompreñ al lavarennoù, an nafvaladennoù,
 Sturiennou ar Furion hag o setafsou kuzh.
- 7 Doujañ an Aotrou eo derou ar Furnez
 Met ar re zibeell a zispriz furenteñ ha kelennadurezh.

Pa 'nem mirille warner ar valz o teurz plod.

Pa gwezho warner ar valz o teurz plod.

LODENN GEN TAN

22 Erbedadenn gentañ an den fur : diwall diouzh ar re zrouk

- 8 Selacu, va mab, kelennadurezh da dad,
 Ha nn'argas ket kentel da vamm,
- 9 Rak ur gurunenn a c'hras e vo evit da benn,
 Un dro-e'houzoug 'vit da gerc'henn.
- 10 Va mab, mar fell d'ar bec'herien da hoalañ
 N'a ket d'asantiañ outo.
- 11 Mar lavarent : " Deus 'ta ganimp,
 Stegnomp pecheù evit lazhañ,
 Kuzhomp antelloù, hep abeg reizh, enep an dud dinamm,
- 12 Lonkomp anezho, bev-holl, evel ar Cheol,
 Hoñl, en o fezh, evel tud o tiskenn er poull-bez.
- 13 Hag a bep seurt madou prizius her bezò diwarne,
 Hon tiez a leugnimp gant e dibourc'hioù ;
- 14 Tennañ a ri plouz berr ganimp evit kacut da lod,
 Un hevelep yalc'h a vo evidomp holi " ...
- 15 N'a ket, va mab, da gerzhout ganto
 Distro da dreid diouzh o gwenodennoù.
- 16 Rak o greid a red d'ober an droug
 Hastañ a reont da skuilh ar gwad.
- 17 En aner e taoler ar roued
 Dirak ar pezh en deus eskell,
- 18 Met int a stegn pecheù a-enep o gwad e-un,
 Kuzhat a reont antelloù a-enep o buhez-int.
- 19 Setu aze doare an dud c'heantek da walc'hennit:
 An drouk-goxproù a gas d'o c'holl o ferc'henned.

7. " Derou " - pe marteze " leunder ".

Galvadennou ar Furnez

- 20 Ar Furnez a lakk kriadennou dre ar straedou,
Lakaat a ra he mouezh da sevel war ar plasennou;
- 21 Prezeg a ra er c'hoazhentoù trouzus,
E-kichen an dorieù hag e-barzh kér ec'h embann he c'homzou :
- 22 " Betek pegoulz, skañvbenneion, e plijo deoc'h mibiliachou ?
Betek pegoulz e plijo godiserezh d'ar c'hoaperion,
Ra d'ar re ziskiant kasaat gwiziegezh ?
- 23 Diwar glevout va c'hoz, en em droit,
Setu maz an da skuilh warnoc'h va spered
Ha d'ho lakaat da gompreñ va c'homzou.
- 24 Met peogwir e c'harman hag e nac'hit va selaou,
Peogwir ec'h astennan va dorn, ha n'eus den o teurel pled,
- 25 Peogwir e tisprizit va c'huzuliou
Ha ne fell ket deoc'h eus va gourdrouz,
- 26 E c'hoarzhin me iveau o welout ho kwallieur
Hag e rin goap pa zeuio warnoc'h ar spouren,
- 27 Pa 'n em daoio warnoc'h ar spont evel ur gorventenn,
Pa 'nem zirollo warnoc'h ar reuz evel ur barrad,
Pa gouezho warnoc'h estrenvan hag enkrez.
- 28 Neuze e vo tud o c'harmiñ etrezek ennon ha ne respontin ket,
Va c'hlask a raint, nemet n'am c'havint ket.
- 29 Dre m'o deus kasaet ar skiant
Ha n'o deus ket c'hoantaet doujañs an Aotrou,
- 30 Dre n'eo ket bet plijet dezho va c'huzuliou
Dre m'o deus disprizet va holl grosadurioù,
- 31 Ra zebrint eus fruez h o fazicù
Ha ra gavint o gwalc'h diwar o mennadoù :
- 32 Rak diboeillegezh ar skañvbenneion a laz'h anezho,
Ha dibreder ar re ziskiant o c'has da goll;
- 33 Met an nepam selaou a ziskuijho er surentez,
Hag a vevo sicul, hep aon rak ur gwalleur bennak. "

Eil erbedadenn an den fur : Talvoudegezh ar Furnez.

2. 1 Va mab, mar degemerez va c'homzou
Mar mirez ganit va reizhadurioù,
- 2 O reiñ da skouarn da selaou ar furnez
O stouif da galon etrezek ar skiant,
- 3 Ya, mar galvez d'az kaout, ar boeillegezh,
Mar savez da vouezh war-du ar veizegezh,
- 4 Mar klaskez anezhi evel an arc'hant,
Mar furchez war-du enni 'vel evit un teñzor,
- 5 Neuze e kompreñi an doujañs ouzh an Aotrou,
Hag e kavi anoudegezh Doue.
- 6 Rak an Aotrou eo an hini a ro Furnez,
Eus e c'henou e teu ar boeillegezh hag ar skiant.
- 7 Evit an dud reizh e vir an eurjad,
Hag eñ a zo ur skeed evit ar re a vale dibec'h.
- 8 Diwall a ra gwenodennou an eeunded,
Beilhaf a ra war hent e garcouriñ.

- 9 Kompreñ a ri neuze ar reizhder, an eeunded,
Ar gwir, hag hell wenodennou ar mad;
- 10 Pa'z antree ar Furnez ez kalon
Pa vezo ar Skiant plijadur da ene,
- 11 E raio gward warnout ar boellegezh et gentañ
hag e vo ar veizegezh da warez,
- 12 Evit diñnik da ziwall dicuzh an hent drouk
Diouzh an den korvigellek e gomz
- 13 A zilez ar wenodenn eeun
Evit kerzhout en rafvedou teñval,
- 14 A gav e zudi oc'h ober an droug
A lak e blijadur gant an dirollerezh,
- 15 Diouzh an den a zo kildroennus e hent
Ha gwidreüs e wenodenn.
- 16 Da ziwall a raio ouzh maquez an nesañ
Ouzh an estrenez lubanus ne c'homzou,
- 17 A zilez ozac'h ne yaouankiz
Hag a ankoua kevredadurezh ne Doue :
- 18 Kosteziñ a ra he zi war-du ar maro,
Hag he hent a gas d'an inferniou.
- 19 Ne zistro nikun eus ar re a ya daveti
Ne adkav nikun gwenodennou ar vuhez.
- 20 Evelse e kerzhi-te en hent an dud a vadelezh
Hag e viri da dweid en roudou ar re reizh;
- 21 Rak ar re vat eo ar re 'anneze ar vro,
Hag ar re zidamall eo a chomo enni,
- 22 E eksit ma vo ar re zrouk troc'het kuit eus an douar
Hag ar re fall tennet dicutañ.

Trede erbedadenn an den Fur : Ober diouzh ar Furnez, rak hi 'zo prizius.

3. 1 Va mab, n'ankoua ket va c'heleñnadurezh,
Ra viro da galon va reizhadurieù,
- 2 Ha deizioù hir a bouchasint dit-te,
Eloavezhiou a vuhez hag eurvad.
- 3 Na lez ket ar vadelezh da vont diouzhit.
Stag anezho ouzh da c'houzcug, engrav anezho ez kalon,
- 4 Hag e c'honezi neuze grad ha brud-vat,
Dirak Doue ha dirak an dud.
- 5 Lak en Aotrouù da holi fiziañs a greizh kalon
Na 'n em harpez ket war da boellegezh-te.
- 6 Az pez soñj anezhañ en da holl gammelou,
Hag e kompezo dit an hent.
- 7 Na vezez ket fur d'az taoulagad-te :
Douj an Aotrouù hag en em zistro diouzh ar gwall,
- 8 Hag e vo yec'hed evit da gorf,
Freskadurezh 'vit da eskern.
- 9 Ro enor d'an Aotrouù gant da vadou,
Gant frouezh kentañ da hell eostou,

- 10 Hag e vo leun a ed da c'hrignolou
E tic'hlanne gant gwin nevez da bentoniou.
- 11 Va mab, na zispriz ket skourjez an Aotrou
N'a ket da heugif oush e c'hourdrcuz,
- 12 hak an Aotrou a gastiz an den karet gantañ
Lvel un tad a groz d'e vab karet.
- 13 Evurus an den en deus kavet ar Furnez
Hag en deus genezet ar boellegezh;
- 14 Rak gwelloc'h gonid eo hennezh eget dastum arc'hant,
Ha gwelloc'h spleit a denner dicuti eget eus an sour fin;
- 15 Priziusoc'h eo eget ar perlez
Ha n'eus brageriz eset a ve kemnt hag hi.
- 16 En he dorn dehou e tegas buhez hir
En he dorn kleiz, pinvidigezh hag encr;
- 17 He hentou a zo leun a zudi
En he gwenodennou e ren ar peoc'h.
- 18 Evit ar re a grog enni ez eo ur wezenn a vihez
Hag an nep en em stag outi a vez evurus.
- 19 Dre ar Furnez ez eo en deus an Aotrou diazezet an douar
Ha gant ar boellegezh en deus startaet an nefvou.
- 20 Dre ar ouiziegezh en deus digoret an islonkou
Ha drezi e lak ar c'houmoul da strilhaf o glizh.

Pevare erbedadenn an den fur : Ar Furnez a zo karantez.

- 21 Mir, va mab, ar furnez hag an emsoñj,
Na zistag ket da zaoulagad dicuto;
- 22 Hag e vint buhez evit da ene
Ha brageriz war da gerc'henn.
- 23 Kerzhout a ri neuze er surentez
Hep na streboto da droad.
- 24 Pa'z i da gousket n'az po ket aon,
Hag ur wech gourvezet e vo dous da hun.
- 25 N'az po ket da spontañ rak ur spouren a drumm
Na rak ur gerventenn o kouezhañ war an dud fall.
- 26 Rak an Aotrou a vi da spi asur
Diwall a ray da droad diouzh pep traped.
- 27 Na nac'h ket ur madober oush an hini en deus ezhomm
P'emañ ez kalloud hen grataat dezhañ.
- 28 Na lavar ket d'az nesañ : " Kae ! Dont a ri endro,
Arc'heazh e roindit ", p'ac'h eus peadra da ziouerif.
- 29 Na itrik ket an droug a-elep da amezeg
Tra m'emañ o chom, leun a fiziañs, ez kichen.
- 30 N'a ket da rendaelif hep abeg oush den ebet
Pa n'eus bet graet a-enep dit ur gaou bennak.
- 31 N'ez ket da aviañ an den gonnarek
Na zibabez hini ebet eus e droioù.

- 32 Rak an Aotrou en deus heug ouch ar re a gerzh a-dreuz,
Evit mirout e vignoniezh d'an dud eeun.
- 33 War di an den fallakr e tiskenn mallozh an Aotrou
E vennozh avat a zo war annez an den reizh.
- 34 Ober a ra goap ouch ar c'hoaperion
Evit grataat e drugarez d'an dud izelek.
- 35 Ar c'hlor a vo lod ar re fur, o'homzok kervirellek
An dismegafs avat a vo herezh ar re ziboell.

Pempvet erbedadenn an den fur : Spleit ar furnez.

4. 1 Selacuit, va mibion, kelennadurezh un tad,
Ha taclit evezh evit deskin poellegezh.
- 2 Rak kentelioù yac'h eo ar re a roan dec'h :
Na zilezit ket va c'heleennadurezh.
- 3 Ur mab on bet evit va zad,
Ur bugel tener ha karet exit e-kichen va mamm.
- 4 Va c'henteliet o deus evel-henn :
" Da galon da viro va c'homzou,
- 2 Mir va gourc'hemennou hag e vevi.
- 5 Genez ar furnez, genez ar boellegezh,
N'ankousez ket, n'en em zistroez ket dicuzh alioù va genoù.
- 6 Na zilez ket anezhi, hag hi az tiwallo,
Kar anezhi, hag hi az kwarezo.
- 7 Setu anañ penn-kants ar furnez : Pren ar Furnez
Pren ar Skiant diwar gwerzh kement a berc'hennez.
- 8 Az pez istim vrás eviti, hag hi az uheliao,
Hi a x vezo da c'hlear pa'z po he briataet.
- 9 Lakaat a raio war da benn ur gurunenn heneuz,
Grataat a raio dit un daledenn dispar."
- 10 Selaou, va mab, degemer va c'homzou,
Ha bloaziou da vuhez 'vo kresket o niver.
- 11 Hent ar Furnez a gentelian dit
En hent ar reizhder a az iakan da vale.
- 12 Mar kerzhez ennañ, ne vo ket da gammédou war an enk,
Mar redez ennañ, ne stroboti ket.
- 13 Mir ~~xx~~ ar gelennadurezh, na laosk ket anezhi,
Dalc'h dezhi, rak hi a zo da vunez.
- 14 Diwall a vont en hent an dud fallakr,
Na gerzh ket en rafved ar re zrouk.
- 15 Pella dicoutañ, na dremen ket drezañ,
En em zistro dicoutañ, ha tremen e-bicu.
- 16 Rak ne c'hellont kousket mar n'o deus ket graet droug,
An hun a ded'h dicoute mar n'o deus ket laket uran bennak da gouezhan.
- 17 Rak ar fallentes eo ar bara a zebront,
An daerijenn eo ar gwin a evont.
- 18 Hent ar re reizh avat a zo splann 'vel ur wereblaouenn
A ya ~~je~~ sked war gresk betek na par an deiz.
- 19 Hent ar re fall a zo ev l tefvalijenn,
Ne welont ket ar pezh o lakay da gouezhan.
- 20 Va mab, bez evezhiek ouch va c'homzou,
Ro da skeuarn da glevout va lavarou.

- 21 Gra na bellaint ket dicuzh da zaoulagad,
Mir anezho en deon da galon.
- 22 Kak buhez ez int evit ar re a gav anezho,
Yec'ned evit o c'horf.
- 23 Diwall da galon muioc'h eget pep tra
Kak dioutaf e tarzh mammennou ar vuhez.
- 24 Kas pell dicuzh da c'henou ar c'homzou korvigellek
Ha dizarbenn an drubardiezh dicuzh da ziweuz.
- 25 Ka sello da zaculagad war eeun
Da sell da yelo a dal dirazout.
- 26 Taol evezh ouzh an hent a lakez da dreid ennañ,
Ha vo bepred eeun da wendenn.
- 27 Na zihenç nag a-zehou nag a gleiz,
Ha distro da dreid diouzn an droug.

C'hwech'hvet erbedadenn an den fur : Diwall d'ouzh an orgedenn.

2. 1 Va Mab, bez svezhiek ouzh va furnez
Rc da skouarn d'am fcellegzh,
- 2 Evit mirout enicot skiantegzh
Ha derc'nei war da ziweuz gouiziegezh.
- 3 Kak muzellicù an diavaeziadez a strilh mel
Ha flourooc'h eget an eoul eo he staon.
- 4 Met en diwezh eo c'hwerwoc'h eget an huelenn
Lemmoec'h eget ur c'hlaze diwzremmek.
- 5 Etrezek ar maro e tiskenn he zreid,
Hag e stok ouzh ar Cheol he c'hammedou.
- 6 Pell dicuzh teurel evezh ouzh hent ar vuhez
Ez a diasur he roud, ne car ket pelec'h.
- 7 Va selaouit enta, va mibion,
Na zistreit ket dicuzh komzou va genou.
- 8 Pella da hent diouti
Na dosta ket ouzh dor he zi,
- 9 Gant aon na rofes da re all yaouankiz da nerzh
Ha da vioavezhiou d'un tirant krix,
- 10 Gant aon na zorfe an diavaeziidi o gwalc'h eus da vadou
Na dremenfe en un ti all frouezh da labour,
- 11 Gant aon na hirvoudfes a benn ar fin
Pa vo kuzumet da gig ha da gorf,
- 12 Ha na laverfes : " Penaos eta am eus gallt kasaat reizhadurezh,
Penaos he deus va c'halon disprizet ar rebech ?
- 13 Penaos n'em eus ket selaouet mouezh va mistri,
Na roet va skouarn da glevout va c'helennerion ?
- 14 War vetek nebeut e can kouezhet er reuzic'h brasaf
E kreiz strolladeg ar bobl".
- 15 Ev douz eus da buñs,
Eus gouver da feunteun.
- 16 Daoust hag e lezi da vämmenn d'en em skuilh ermaez
Ha da wazioc'h-dour da vont dre ar straedou ?
- 17 Ra vezint evidout da unan
Ha n'eo ket kenlodet da dud an disvaez.

- 17 An daoulagad dalc'h, an teed yaouist,
 18 Ra vo benniget da eienenn ! : firebosh,
 19 Kav da levez gant gwreg da yaouankiz,
 20 Heizez a garantez, gazeleenn vistr:liber,
 21 Ra vi mezvet bepred gant he c'hoantiri
 Drevaet atao gant he c'harantezicù: breudan r.
 20 Perak orgedi fi ouzh un estrenez
 Ha pokat da vruched un diaavaeziadez ?
 21 Rak an Aotrou a zo stag e zaoulagad ouzh hentoù an dud,
 Sellout a ra pizh ouzh o gwenodennou.
 22 Paket e vo an den fallakr en roued e zrougiezh
 Dalc'het e vo gant ladow e bec'hed.
 23 Mervel a ray diwar e vank a reizhmadurezh,
 Dihenhet e vo gant e re-veur a folientez.

Sturiennou liesdoare

- 1 Va mab, mar ac'h eus roet arrez evit unan all
 mar'd ac'h eus respontet evit un diaavaeziad,
 2 Mar'd out erreet gant komzou da vuzelloù
 mar'd out liammet gant lavar da c'henou,
 3 Gra 'ta kevent-mañ, va mab : En em denn ac'hano
 Peogwir emaout etre daouarn da nesañ,
 Kae, hast buan, ha dalc'h warnañ oc'h aspediñ;
 4 Kousked ebet d'az taculagad,
 Diskuizh ebet d'az malvennou.
 5 En em denn evel ar c'hazelenn diouzh ar chaseer
 Evel al labous diouzh dorn an evnetaer.
- 6 Kae da welout ar merion, den lizerik !
 Sell pizh ouzh o doare, ha deus da vezaf fur.
 7 N'o deus rener ebet,
 Nag ensellerion, na pennrcue;
 8 Ha kempenn a reont boued-mir en hañv
 Dastum a reont en eost peadra da zibrin.
 9 Ha te, betek pegeit e chomi gourvezet, den lezirek !
 Pegoulz e savi diwar da gousk ?
 10 " Ur spenladig hun, ur penladig mored,
 Kroazian ur pennladig, an divrec'h da gousket,
 11 Hag evel ul ~~xxxxxx~~ laer e teu ar baourentez
 Evel un den armet, an dienez !
- 12 Un den didalvez, an den fallakr,
 Hennezh hag a gerzh war rakk, yudaserezh en e c'henou ,
 13 O wilc'hat gant e lagad, o komz gant e droad,
 Oc'h ober singant e vizied;
 14 N'eus nemet fallentez en e galon,
 Emañ bepred oc'h ijinah drougiezh
 O lakaat rendaeiou da sevel;
 14 Setu perak e vo diskaret a greiz holl,
 torret en un teol trumm ha diremed.
- 16 C'hwec'h a zo a vez kasaet gant an Aotrou,
 Ha seizh zoken en deus rukuh cuto :

17 An daoulagad balc'h, an teod gaouiat,
 An daouarn a skuilh ar gwad direbsch,
 18 Ar gaion a itrik mennadoù fallakr,
 An treid a hast da redek d'ar gwallober,
 19 An test faos a zistag gevier,
 Hag an den a had dizunvaniezh etre b'reudeur.
 20 Kendalc'h ar c'hwech'hvet erbedadenn.

20 Va mab, mir reizhaduriou da dad,
 Na zistaol ket kelennadurezn da vamm :
 21 Dalc'h anezho bepred liammet war da galon,
 stag anezho ouzh da gerc'henn.
 22 Da vleniañ a raint pa gerzni,
 Warnout e raint gward pa gouski,
 Ha ganit e tivizint pa zihuni.
 23 Rak ul lamp eo ar reizhadur, ur gouloù eo al lezenn,
 Mag hent ar vuhez eo ar gourdrouz hag ar c'heleñn,
 24 Evit da ziwall diouzh ar vaouez fallakr,
 Diouzh teod lubanus an estrenvez.
 25 Na c'hoanta ket he c'harrder ez kalon,
 N'en em lez ket da vezañ paket gant he selladoù.
 26 Rak evit un orgedenn e tiskenner d'un tamm bara,
 Hag ar wreg avoultr a dap en he c'hrog ur vuhez prizius.
 27 Daoust hag e c'heller kuzhat tan er c'hrubuilh
 Hep na ve dévet an dilhad ?
 28 Daoust hag e c'heller kerzhout war regez bev
 Hep na vefe losket an treid ?
 29 Evelse evit an hini a ya da gaout gwreg an ne sañ :
 Ne chomo ket digastiz an nep a stok outi.
 30 N'eo ket pec'hed bras pec'hed an den a laer
 Evit terriñ e c'hoant pan en deus naon,
 31 Ha koulskoude, mar 'd eo surprenet, e rento seizh gwech kement-al
 E roio kement a zo en e di.
 32 Met an den ec'h avoultriañ a zo dibourvez a skiant,
 Fellout a ra dezhañ en em goll, an hini a ra kerent-se :
 33 Ne gavo nemet gloesziou ha dismegafs,
 Hag e vezhegezh ne vo ket diverket diwarnañ;
 34 Kak an ozhac'h fulcret en e oaz
 A vo didruez en deiz an dial,
 35 Ne raio van ouzh priz-daspres ebet,
 Ne zégemero retra, ha pa ginnigfes roadou war roadou.

1. 1 Va mab, mir va c'homzou,
- Ha dalc'h ganit-te va gourc'hennet, anti,
2. Sent ouzh va re claduriou ma vevi,
- Mir va xxiaidurisk c'heleñnaduriou evel mab al lagad :
3. Stag anezho ouzh da vizied,
- Engrav anezho war daolenn da galon,
4. Lavar d'ar furnez : " Va c'hoar ez out-te ",
 Hag any ar boellegezh : " Va mignonez ! "
5. Ma tiwallint ac'hant ouzh gwreg egile
 Ouzh an diavaeziader fleur he c'homzou.

- 6 Evel ma can e touil preestr va zi,
E sellen a dreuz d'ar ~~gum~~ glouedenn,
- 7 Hag e spurmantis e-touez ar skafvbenneion,
E-touez ar baotred yaouank, e taclis pled ouzh ur c'hennard
dibourvez a skiant :
- 8 Tremen a rae dre ar straed, e-kichen ti ur plac'h seurt-se,
Pa oa en e tistreif d'ar gêr :
- 9 Ar serr-nez e oa, diskar an deiz,
An eur ma teu teñvalijenn an noz.
- 10 Ha setu ma tosta outañ ur vacuez
H Gwisket e giz un oriadez, gwidreus he c'halon.
- 11 Birvih a zo enni, dalc'h ebet ganti,
He zreid n'hellont ket chom en he zi :
- 12 Bremah war ar straed, ha bremah war ar blasenn ,
E pep korn emañ o chchedal...
- 13 Kregiñ a ra er paotr yaouank, pokat dezhañ,
Ha divergont he neuz e lavar dezhañ :
- 14 : " Dieout a raen kinnig sakrifismou pecc'haus,
Hag hizio am eus akuitet va gouestlou.
- 15 Dre se on aet ermaez en arbenn dit,
Evit da glask, ha da gavet em eus.
- 16 Aozet em eus va gwele gant palennou,
Gant mezer brodet a neud an Ejipt.
- 17 Skuilhe t em eus war va gwele frondou ar mir,
An aloes, ar c'hinamom.
- 18 Deus, am em vezvomp a garantez betek ar beure,
Taftvaomp levezh ar plijadurezhicù.
- 19 Rak va ozhac'h n'emañ ket er gêr,
Aet eo kuit evit ur veaj da beli
- 20 O kemer gantañ ur yalc'had arc'hant :
Ne zistrice neret d'allcargann ".
- 21 Dre hir-gomzou e hoal anezhañ,
E sachañ a ra dre lubanerezh he muzelloù.
- 22 Hag en da vont raktal war he lerc'h
Evel an ejen a gaser d'al lazhdî,
Evel ar c'harv em em strink er rouedou
- 23 Betek d'ur bir dont da doullañ e avu;
Evel al labous en em daol ei lasou
Hep gouzout ez eus kaoz aze eus e vuhez .
- 24 Ha bremah , va mibion, va selacouit,
Taolit evezh ouzh va c'homzou :
- 25 Arabat d'ho kalon mont d'en em goll war-lerc'h ar wreg-se,
N'en em ziankit ket en he gwenodennnù.
- 26 Rak niverus eo ar re 'zo bet gloszet ganti,
Ur c'halz a dud ar re he deus lazhet.
- 27 He zi a zo hñtt ar Cheol,
Diskenn a ra da lec'h-annez an Ankeù.

14 " Sakrifiseù pecc'haus " a veze kinniget da Zoue e sin a drugarez, evit ur gouestl deuet da benn-vat. Peurliesañ e veze graet en hevelep deiz ur pred bras gant ul lodenn eus al loened kinniget (sell. ouzh Tobias 2,1). Ag'hano ar gouviadenn graet amañ.

54 An hag eñ ne ro ket c'hourc'hennet en eñnevez gant,
 55 Eil galvadenn ar Furnez sien-douar.
 56 Eil galvadenn ar Furnez sien-douar.

8. 1 Ar Furnez, hag-eñ ne c'lalv ket ?
 Ar Skiant, hag-eñ ne ro ket he mouezh da glevout ?
- 2 En em zerc'hel a ra war lein ar c'hrec'hiennou
 Hag er c'hroazhentou.
- 3 Krial a ra e kichen an touricù ar c'hennion.
 Test d'an doricù, en digereù ar gêr :
- 4 " Tudoù, deoc'h-c'hwi e krian,
 Va mouezh en em dro da c'hervel mibion an dud,
- 5 Skafvbenneion, deskit ar boellegezh,
 Tud diskiant, deskit ar veizegezh.
- 6 Selacuit, rak traou kaer-dispar am eus da lavarout,
 Ne vo nemet reizhder o tont ermaez eus va diweuz.
- 7 Rak va genouù a embann ar wirionez,
 Ra va muzelleù a haug ouzh ar fallagriezh.
- 8 Holl lavarou va genouù 'zo gwirion,
 N'eus enno netra faos, netra korvigellek.
- 9 Sklaer ez int evit an nep en deus meiñgezh,
 Eeun ez int evit ar re o deus goñezet ar skiant.
- 10 Keseveit ar gelennadurezh kentoc'h eget arc'hant,
 Prizit ar skiant kentoc'h eget acur fin,
- 11 Rak gwellec'h eo furnez eget nerlez,
 Ha n'eus brageriz ebet a dalv anezhi.
- 12 Me ar Furnez, am eus ar boellegezh da vignonez,
 Ar skiant hag an evezhiegezh da vitizhion.
- 13 Doujañs an Aotrou eo kasoni an droug:
 Lorc'haj, regentez, hent fallakr,
 Genouù gaouiat, sed ar pezh a argarzhan.
- 14 Din-me ar c'huzul hag ar berz-mat,
 Din-me ar meiz, din-me an nerzh.
- 15 Drezon e ren ar rouaned,
 Drezon e c'hourc'henn ar brinsed hervez ar reizhder,
- 16 Drezon e c'houarn ar pennou bras,
 An dud e katg, holl varnerion an douar.
- 17 Karout a ran ar re am c'har,
 Hag an nep am c'hlask, am c'havo.
- 18 Pinvidigézh ha kloñ a zo ganin
 Ar madoù padus hag ar reizhder.
- 19 Priziusoc'h eo va frouezh eget an ~~eskijink~~ acur purañ,
 Ha gweiloo'h va spleit eget an arc'hent ar glanañ.
- 20 Kerzhout a ran en hent ar reizhder,
 E kreiz gwenodenn an euaned,
- 21 En ur reñ va madoù da herezh d'ar re am c'har,
 En ur leuniañ e zénzeriou.
- 22 Va ferc'hennet en deus an Aotrou e-penn kentañ e hentoù,
 Araok ober netra en dercù.
- 23 Diazezet on bet a holl viskoazh,
 A-dal ar penn-kentañ, srack ginivelezh an douar.

- 24 An islonkòù ne oa ket c'hoazh anezho ma oan-me ganet,
Ne oa ket c'hoazh tarzhet an eien-dour.
- 25 Araok d'ar menezioù bezañ ~~dixxazet~~ stabiliaet,
Araok an torgennou, e oan ganet,
- 26 Araok m'en devoa graet an tir hag ar maeziou,
hag elfennou poultr an hellved,
- 27 Pa gempzanne an nefvou e oan eno,
Pa drese ur gelc'hienn war gerre ar c'hendon,
- 28 Pa startae ar c'houmoul war an nec'h
Pa zenvae mammennou an islonk,
- 29 Pa verke d'ar mor e harzoù
Nan afe an douriou en-tu-hont d'an aodoù,
Pa ziazeze font an douar,
- 30 E oan en e gichen o labourat gantañ,
O 'n em laouenaat bemdez, hag o c'hoari dibauciez dirazañ,
- 31 O c'hoari war voull an douar,
Hag o kaout va dudi e-touez bugale an dud.
- 32 Ha bremañ, va mibion, va selaouit :
Evurus ar re a zalc'h em hentoù !
- 33 Selaouit ar gelennadurezh evit dont da vezañ fur
Ha n'he distaolit ket !
- 34 Evurus an den am selacu
A vez o veilhañ bemdez ouzh va doriou,
Oc'h ober gward war o banhoù.
- 35 Kak an hini am c'hav a gav ar vuhez,
Hag a c'honez grad-vat an Aotrou.
- 36 Met an hini a bec'h ouzhan a c'hleaz e ene;
Ar re hell am c'hasa, a gar ar maro.

Banvez ar Furnez ha banvez ar Follentez

- 1 Ar Furnez he deus savet un ti eviti hec'h-unan,
Kizellet en deus ar seizh kelonenn anezhaf;
- 2 Lidlazhet he deus he loened, mesket he gwin,
Ha kempennet he zaol-pred.
- 3 Kaset he deus he mitizhion
Da c'hervel eus lein uhelennou-kér :
- 4 " D'an nep 'zo diwidre d'antron amañ ! "
Ha lavarout a ra d'an nep a zo diskiant:
- 5 " Deus, debr eus va bara,
Hag ev eus ar gwin am eus mesket.
- 6 Dilez ar sotoni hag e vevi,
Ha kerzh en hent ar veizegezh ! "

- 7 Nep a damall ur goapaer a denn goaperzh war e benn e-unan,
Hag an nep a c'hourdrcuz un den fall a sach warnañ e-un kumujenno
- 8 Na grez ket d'ar goapaer, da gasaat a rafe,
Skandal an den fur; da garout a rafe.
- 9 Kelenn an den fur, ha furec'h e veze c'hoazh,
Ho kentel d'an den mat, hag e kresko e veizegezh.
- 10 Penn-kentañ ar Furnez eo doujañs an Aotrou,
Hag ar boellegezh eo skiant vat ar Sant.

- 11 Rak drezen e kresko niver da zeizic'h,
Ha liesaet e vo dit bloavezhiou da vuhez.
- 12 Mar 'd out den a furnez e terni gonid dicuti,
Mar 'd out den a c'hoaperezh e vi sammet gantaf.
- 13 Ar Sotoni 'zo plac'h trouzus,
Macuez dibocell, na ear netra.
- 14 War he c'hoazez emañ, war ^{leit} dreuzou dor he zi,
Pe war ur gador, war uñelennou Kér,
- 15 Evit gervel an dremenerion
A ya war eeun gant o hent :
- 16 " D'an nep 'zo diwidre d'antren amañ ! "
Ha lavarout a ra d'an nep a zo hep skiant :
- 17 * An douric'h kuzh eo an dousañ,
Ha bara ar mis ter ar ~~ekwiskh~~ c'hwekah ! "
- 18 Ha n'ouier ket ez eus eno spezou,
Emañ dija he c'houvidi en deon an iferniou.

EIL LODENN

DASTUMADER KENTAN A LAVARENNOU SALAMONIAT

10. 1 Lavarennou Salamon.

- Ur mab fur eo joc e dad,
Ur mab dibocell, glac'hар e vamm.
- 2 Teñzoriou berniet diwar fallagriezh n'eus ket g Gonid ganto,
Met reizhder hag aluzon a zieub diouzh ar maro.
- 3 An Actrou ne lez ket ene an den reizh da c'houzañv pean gant an naon,
Met disteurel a ra ku. t gwall-choantou arre fall.
- 4 Oberenn an dorn diegus a zo da le'hamat paourentez,
An dorn oberiant avat a zastum pinvidigezh.
- 5 An nep a zastum en hañv a zo ur mab a ~~g~~ellegezh,
An nep a gousk e kerzh an eost, ur mab a vezhegezh.
- 6 Ar vennozh a ziskenn war benn an den eeun,
Met genou ar re fall 'zo kuzh ar gwall enne.
- 7 Envorin an den reizh a dalv da vennigañ,
Met ano an den fall a dro da vreindur.
- 8 An den fur e galon a zegemer laouen ar recliaduriou,
Met redrek a ra d'e goll an nep a zo diroll e vuzelloù.
- 9 An nep a gerzh en hent eeun, a ya gant surentez,
An nep a ra gant kildreic'h a vo dizeleot.
-
- 18 En deon an iferniou : en donder ar Cheol.